

GUERZ

VAR ZUJET

MERZERENTI ZANT ADRIEN

Ton Cantic ar Feiz, pe ton Santez Mari.

Guerc'hez gloriuz Vari, Rouanez ann Eled
Obtennit nerz d'am c'homzou, sclerigen d'am speret,
'Vit ma hallin recita histor sant Adrien,
Hac er c'hana en eur verz, d'am breudeur cristenien

Alas ! va c'homzou zo simpl, va speret zo dister,
Evit allout explica eun evelep matier,
Indign ez-on, ziousas dia, d'ober eur sort labour,
Nemedoc'h, Mamm galloudoz, a zeufe d'am zicour.

Leun a fianç enoc'hu, me guemer va fluen,
Hac e hessañ scriva eur verz neve da ben,
Ha goude me hi c'hano, var un ton quer huel,
Me vezo clevet a bel, gant an oll dud fidel.

Sant Adrien zo unan demeus hor patroned,
Enn e enor eun iliz, e Scaer, a zo zavet ;
Mez ann darn vraz a c'hanomp, ne anaveemp quet,
Nac e vuez, nac ar gloar, en deveus meritet.

Enn amzer ma commande Valer Maximien,
Mevl fidel da Zatan, tirant ar gristenien,
Tri den varnuguen, fidel da lezen ho Doue,
A guze enn eur c'havern arog an tirant-se.

Hac eno int a gane psalmou epad an noz,
Unisset dre ar galon, gant sent ar baradoz,
Sevel a rezont er fin, ho moueziou quer huel,
Ma ouent clevet, denoncet, casset d'ann den cruel.

Ha neuze oa gret dezo, 'vel d'ar gristenien all
Ann tourmanchon cruella a gomansas ractal ;
Mez euz o gulet ato joaus evel eled,
Ho bourrevien momeus a chomme estonnet.

Ministred Maximien ne oant quet cristenien
Eus an nombre oue unan, e hano Adrien,
Carguet da exeuti, urzou e vestr barbar,
E galon a zo touchet gant ar brassa glac'har.

Adrien, unan demeus ar c'henta ministred,
En doa eiz vla varnuguen ha nevez demezed,
Ha pa velaz ar ch'ourag demeus ar verzerien,
En a zantas ann dezir, d'enn em renta cristen.

Souezet ha mantret eo, dre vuzudon quer bras,
Hep doutans quemet ma, zo eun tol euz ar c'hras,
E bried oa christene, a bede evita,
A guemen se Adrien ne ouie c'hoas netra.

Nathali, greg vertuuz, a oa merc'h d'eur merzer
Ha christenes e secret boe he c'henta amzer ;
Mez urzou Maximien, o veza hi spontet,
Ne grede quet in anzaou, memes euz he fried.

Adrien, petra benac ne oa quet c'hoas cristen,
Enn devoa eur galon vad, ha biscoas ienigen,
Biscoas ann distera trous, etre ann daou bried,
Beva e reent er joa, en eur garante barfet.

Nathali, mintin ha noz, a bede a galon,
Doue da rei sclerijen d'he fried, d'he mignon,
'Vit ma tenje hep dalle, d'annaout ar guir lezen,
Ha Doue gant madelez, a glevaz he feden.

O velet ar verzerien o souff gant calz a joa,
Adrien a zeu d'ho fidi da lavaret deza,
Petra a alle neuze o renta quer contant,
Ma reent ho flijadur, euz ar brassa tourmant.

O c'honjuri a reaz enn hano ho Doue,
Da lavaret dean eta, scler ann oll virione,
Pe seurt profit er mez a sonjit-hui tenna,
Euz ann dispriz-se a rit euz a draou ar bed-man.

Mar n'enn deoc'h quet disquiant pe troet ho speret,
C'hui a gred a zonz dime, beza recompanset,
Respont a rezont dezo, oll er memes mouez :
Ia, autro, c'hui oc'hunan, a lar ar virionez.

Mez impossibl ez eo deomp na da zen all er bed,
Explica ar bonheur-ze, a zo deomp preparet,
Biscoaz n'en deo bet clevet, gant descouarn un den,
Eur recit quer burzuduz, ne aller er c'homprenn.

Ar bropheted scleriet, gant ar Speret-Santel,
Oll ar pezh o deus laret a zo chomet c'hoaz pel,
Da allout ober compren ar bonheur preparet,
Gant Doue, er baradoz, d'ar re a vo choazet.

Biscoas daoulagad ann den n'o deveus bet gulet,
Na biscoas ann discouarn, n'o deveus sur clevet,
Biscoas ar galon santet, ama, var ann douar,
Ar pezh en deus preparet Doue d'ar re er c'har.

Ar c'homzou ma, a zant Paul, tennet eus a Isai,
Ha gant ar verzerien, repetet gant guir fei,
A reaz var Adrien eur sort impression,
Ma achuas ar glac'har da dreuzi e galon.

Ha neuze 'n eur lam pe zaou, cetu ema rentet,
E mesq ar verzerien a renq ar ministred ;
Hac enn eur zistrei oute, e lavaraz dezo,
Hastet buan emeza da lavar em c'hano :

Da ho mestr Maximien, penoz e zon christen,
Ha penoz e refuzan d'ober ar pezh a ordren,
Maximien eus a bel, en doa credet certain,
O velet e Adrien e mesq ar verzerien.

Enn doa gret e oll bossubl evit o distrei,
Hac o laqat da renoué da Zoue ha d'o fei,
Hac o credi quement-se, enn devoa ordrennet
Ma vize lemet d'ar bobl ar pezh a oa skrivet.

Rac n'en devoa donetans n'en dije Adrien,
Accuzet publicamant, ar paour quer christennien,
Mez e vinistred a zeu prompt d'en zaludin.
Dionallet mad ementi ne zeufoc'h da gredi,
En de Adrien netra da repech d'ar re-ze,
Discleria ra er c'hontrol ez eo christen ive.

Maximien en em droubl, monet a ra en arach,
Mes ar gristennien fidel eo doublet ho c'hourach,
Gouzout a ran e mant prest da vont da bossedi,
Bep a gurunnen 'vit priz eus ho tourmancho cri.

Maximien a ra urz da zigas Adrien.
Ha gant eur goler estranch e c'houlén evelen :
Ha fol oude Adrien ha fel a ra dide,
Lacat da vué e pris, ha mervel hep dale !

Adrien a respontas gant un ær quer contant
Pel da vud collet guenén, brema va zantimant,
Me a zo dent oll gouiec, inspiret gant an ée,
Ha mont a ran da c'honit gant joa ar guir vue.

Ouale'h ! ouale'h, eme ann tirant, a gomzou direzon
Allon ! goul buan brema de guenime pardon,
Ia, eme Adrien, me a c'houlén pardon,
Demeus va oll bec'hejou, euz ann Doue guirion.

Ann tirant a ordrennas neuze d'he vinistred,
En carga a chadennou evel he gonsorded,
Hac en scai hep truez evel to er prison,
Quen a teuge e huan da rei punition.

Eun esclav da Adrien, estonnet ha nec'het
O velet e vestr quemeret, chadennet, prisonniet,
A redaz da lavaret d'he bried quer fidel,
Penaus e oa arretet evel eur c'hriminel.

Nathali zo quer spontet o cleout ar c'helou-ma
Ma crogas en hi dillad evit dont d'ho roga,
Petra, siouaz ! emezi, en deus gret va fried,
Pe eo tolet er prison gant ar griminals.

Ann esclav a respontas : va mestr mad o velet,
Tourmantit tud gauz d'unan a zo ar C'hrist hanvet
'N euz laret d'ar scrivanourien quemeret va hano,
Rac vel ar reze ive ne a ielo d'ar maro.

Nathali a repliquaz : ha sur a ouale'h oude,
'Vit petra e tourmanter evel-se an dud-se,
Deja eme ann esclav, em biez deoc'h lavaret
E zeo a gauz da un den a zo ar C'hrist galvet.

Ha dre ma caront henes hint-zo 'n em obstinet,
Da nonpas sacrifica d'ann doueou pañaned,
Ann dra-ze hep-quen, zo cauz ma int tourmantet,
Ha va mestr mad a vezo evel dezo treet.

Nathali zo consolet, dansal a ra gant joa,
Monet ara da visqua he habijou caëra,
Evel pa iaze d'eur fest, hi a ia d'ar prison,
Da gonsoli he fried, a gare a galon.

En em strinqua a ra d'he dreid, poquet d'he chadennou,
Hac o arozi a ra dourec gant hi daëlou.
Ar joa zo en he c'halon, consoude eo mantret,
O sonjal er poaniou eriz preparet d'he fried.

Courach ! courach ! va mignon, courach ma fried quer,
Ann tourmancho se quer eri, a vezo meurbet ber,
Evit eur momet a boan da echui ho pue
C'hui a vezo curunet 'vit ann eternite.

Ah ! eurus oc'h emezi, eurus oc'h, Adrien,
Da veza bet ar bonheur d'en em renta christen,
C'hui a ia da bossedi madou caër dishenvel,
Eus ar re lezet guenoc'h, gant ho tud a vervel.

Choas, iaouanc flam va mignon, c'hui oc'h eus sur cavet
Eun tenzor ha n'ho pige beviquen dastunet,
Peguer benag a vesec'h, caer ho pige poania,
Ann tenzor-ze va mignon, ne quet eus ar bed-ma.

Me ho ped, va mignon quer, eus a greis va c'halon,
Da zont da berseveri en ho vocation,
Doue d'eus hi digasset deoc'h demeure an ée,
Hac ho recompanso mad eus ho fidelite.

N'en em lezet quet eta da veza arretet
Balamour d'ar yaouanquis balamour d'ar guened,
Na quen neubeut dre ar sonch ho pe eus ho querent
En eur ho c'huitat c'hui eo da renn gant ann oll Zent.

Disprizit va mignon quer ho pinvidiguezou,
Disprizit ho hesclaved hag ho holl enoriou,
Ne staguet mui ho calon demeure a traou ar bed,
Pere a zisparisso eun deiz evel moguet,

Ho c'houzout penoz eur veich a vezo ret mervel,
Fixet mad ho taoulagad, var an traou eternal,
Elec'h ar madou tromplus ho pezo dilezet,
C'hui a gavo madou all, ha n'o deus priz er bed.

Dioualit mad va mignon, gant aon da vean tromplet,
Dre guzulliou ho querent, pe re ho mignonet,
Ha gant muoc'h a zoursi tolit ive eves,
Eus promesseou an tirant, carguet a drompleres.

Gueloc'h ez eo deoc'h cals e teufe d'ho cassad
Evit donet d'ho caret da rei deoc'h e c'hras vad,
C'hui ranqe e gontanti dre beb sort servichou,
Ha renta 'vel diaguent ezang d'he idoulou.

Elec'h ober quement-se, dent da guemer model
Var ho compagnoned vad ar verzerien santel
Imitet ho vertuziou, heuliet eon ho roudou,
Ar re-ze ho conduo da joaiou an êvou.

N'ho pezit eta nep aon aroc an tourmancho,
Da vud troet var eur rod pe rostet er flamou,
Pe piquet gant coutili, pe gant bizier dornet,
Pe tolet d'ar loened gouez ha gant o dent malet.

Ar c'hrist o c'heus anzavet zo nerz ar verzerien,
Me en ped a greis calon da zonet d'ho souten,
Quemerit courag eta, ha credit gant fianç
Penoz e fin ar poaniou, a vo ar recompan.

Adrien zo courachet gand comzou e bried,
E joa hag e fizianç ann hanter zo cresquet,

Hi srugarecat a ra demeus ar garante
Hi deveus douguet deza betec fin e vœ.

Ha dre ma oele a oa aru tostic da noz,
En a ra e c'honge dei hac ive e venoz :
Qued breman tranquill d'ar guer emeza va c'hoar guer,
Debret ha cousquet hep n'ec'h, 'vit var boez va affer.

Ha pa zeui ar Barner d'am c'hass d'an Tribunal,
Me laqueo unen benag d'ho havertiss racial,
Evit ma allot receo va divez hunaden,
Hag assuri va bonheur d'ec zecour ho peden.

Esperanc em beus ive da veza sicouret,
Dre ar pedennou fervant demeus va c'honsorded,
Staguet e zint oll ama gant ar memes chaden,
Hac oll e vint unisset ive dre ar beden.

D'ar c'homzou ma Nathali a zavas gant respect,
Da chaden ar verzerien hi a ha da boquet,
D'an eil goude eguile hi a ra hi c'hemmiad,
An daelou 'n he daoulagad, gand ar c'heun d'o c'huitat.

Me ho ped a greis calon servicherien Doue,
Da gresqui ha da great fei an danvad neve,
Grit ma teui da gompren, pe quer bras recompanç
'Ita Doue d'ar re a vev, a varv en e zoujanç.

Hac o troi a dare e trezec'h Adrien,
En eur zec'ha hi daëlou, hi a gomz evelen :
Dioualit mad va mignon, va mestr ha va fried,
Ne zeufac'h o col courac'h da veza distroet.

Ne zongit en ho quened na barz va hini-me,
Roit hep partac'h er bet ho calon da Zoue,
Henez eo ar guir guened ; guened ann traou crouet,
Ne zerviche da ficha nemet boed ar preuned,

Distaguit net ho calon, diouz ann aour, ann arc'hant,
Pere ne dallint netra da zeis ar jujamant :
Na madou, na dillad caër, netra a gueiment-se,
Ne iel guenoc'h, va mignon, da dribunal Doue.

Nathali var quement ma, en em dennas d'ar guer
O lezel er chadennou, Adrien he fried quer,
Enn a zo leun a gourach, ne zant mui e boaniou
Tanva a ra en avanç ar joa eus ann envou.

Eun neubent amzer goude e clevas Adrien
E vize galvet dirac tribunal Maximien,
E gompagnoned hac en evit beza barnet,
Ha promettet en devoa cas quelou d'he bried.

'N em adressi ra dezo hac e c'houlou oute,
Evel digant ar gardou m'en divege conge,
Da vont e hunan d'ar guer, da guerc'hat e bried
P'en d'oa promettet dre le vige avertisset.

Consanti a rezont oll, en em rent a rant cred,
Ha neuze an oll gardou, pere a oa peet ;
E lezont ar prizonner da vont e liberte,
P'en devoa o assuret penaus e tistroje.

Pa oue Adrien en hent, e oa bet remerquet
Hac un den a redas prompt d'er laret de bried :
Aru ez eo, emeza, Adrien libr d'ar guer,
Hastet eta Nathali, da zont d'en diguemer.

Elec'h n'em rejouissa demeus ann eventi,
Nathali, nec'het meurbet, a gommans hirvoudi,
Credet hi deveus parfet, ez e deut Adrien,
Da zouja d'ann tiranted gant aon rac an anquen.

Querquen ha ma rem erquas Adrien o tonet,
Ar pez a oa en hi dorn, quit e deveus sclapet,
Hac e redas hi he unan da zera dor he si,
'Vit n'alje quet Adrien donet betec eni.

Hac o hadressi deza ar gomz demeus an ti,
Biquen ama, emezi, te ne antrefes mui,
Pel diouzin an heni a nac'h e vir Doue,
A drahis e gonsianç o verza e ene.

Idolatr, di-quiantet ô maleurussa den,
Perac quemeret eur bec'h ha ne ale douguen
Ah ! piou en deus gret dide dont da goll d'a speret
Ha quittat quer buan-ze ar zent d'a gonsorted.

Betec neuze Adrien ne respontas netra
Lezet en doa Nathali da brezec da ouela
Ha profitet en devoa demeus hi rebechou,
Quemet pe muioc'h memes hac eus he havizou.

Squis o velet Nathali oc'h en em zeplori,
Gand eun ton a assuranc en lavaras dezi :
Me n'em bens quet troet queign, evel ho c'heus songet,
Mes deut on da lavaret ar pez oa promettet.

Ha gouscoude Nathali n'hi deus quet credet c'hoas,
Repech a ra d'hi fried, n'eo nemet eur Judas,
Hastit da zigor ho tor, a respont Adrien
Pe me a ia da zistrei, ha 'n em guelfet mui quen.

Me n'on deut betec ama, met gand permission,
Hac aru eo ar moment da zistroi d'ar prizon,
Digorit eta an or buan din va fried,
Rac deut on da lavaret ar pez 'boa promettet.

Hastit rac ne allan quet chom da goll ma amzer,
Lezet em beus 'vit credou va oll gonsorted quer,
Mar 'n em rentan er prizon, d'ar poent ma zo merquet,
Me a vo caus ma vezo o foaniou c'hoas cresquet.

Nathali a zeu brema d'aneout ar viriones
Digor a ra prompt hi d'or ha brema hi d'eus mez,
Da vud refuzet digor d'he fried quer caret
Da behini oa deja dor an êe digoret.

Goulen 'ra pardon outan eus a greis he c'halon,
Hac en heulia a ra, var ann eon d'ar prizon
Chom a rei eno ganta hep e guitat morse,
Quen en devezo rentet da Zoue he ene.

Ann tourmanchou cruella a oufer da gompren,
A c'hortoe Adrien hac an oll verzerien,
Crena a ran gant horeur, dont a ra da goeza
Va fluen demeus va dorn pa essean o scriva.

Scoi a rer ar verzerien, quer stang eo an taoliou,
Quer ere ma teue ar c'hig da goeza a dammou ;
Mez n'en deus muzul erbed, 'vit arach Maximien,
Pa vel Adrien o souffr hep an distera clem.

Goude beza dispennet e oll guig abeion
Quen a oa gant an tauliou toulet den e voelou
Ann tirant a ordrennas gant cruelder barbar
Flastra an eil hac e ben, d'ar merzer e ziou c'har.

Epad ma oa Adrien o souffr poaniou quer cri,
Nathali a oa eno evit er c'hourachi,
Pegui a ra e heunan e gar hi Adrien
Pa zeuas var an ann ar boureo de hasten.

Ha pa oa da Adrien e zisvisquer flastret,
Nathali a lavaraz, neuze c'hoaz d'he fried :
Astennit brema ho torn, ma vo ive flastret,
Ha souden a vèzo tout ho holl boan a chuet,
Adrien a astenn e zorn ia d'e bried quer
Evit an diveza merq a garante tener.

Nathali, gant hast da velet ar fin eus e boaniou,

Ha da velet e ene o nijal d'an envou,
A boz an dorn mignon-ze ractal var an ann
Hac ar bourco en distag demeus he vrec'h dioustu.

Adrien en deus tennet an diveza hunaden,
Etre divrec'h e bried goule eur sort anquen,
E maint o daou en envou, curunet gant Doue,
Pedomp an ée d'hor zicour, ma ialimp di ive. AMEN.

FIN.

